

8N3-4-029




KANTIKOU

BREZOUNEK

evit ar rugale

Eskopti Kemper ha Leon



KEMPER

MOULLET & TI ARSENE DE KERANGAL,

Moullet ann Eskopti.

Inprimatus:

Kemper, 19 a viz meurs 1919

A. Cognéau
v. g.

Pederman d'icuz ar meintin hag ar voy
hag ar Angelus a voy kavet e leor
ar ibatidiz.



KANTIKOU

1 ARAOK AR BREZEGEN

Spered-Santel, Spered a sklerijenn,
Plijet ganeoc'h ennomp brema diskenn.
A sklerijenn kargit hor sperejou,
A garantez tommit hor c'halounou.

Ann Ebestel, enn eur zal asamblet,
A dan ho kras oc'h euz bet holl karget ;
Bet evidomp ar memes madelez,
Ne d-oun, slousz l' nemet sempladurez.

Gnere'hez Vari, esperans ar pec'her,
Pedit Jezuz, ho mab hag hor Zalver,
Grit d'hor spered koumpren komzou Doue
Ha d'hor c'haloun ho miret goudeze.

2 EVIT AR VENEDIKSION

Adoromp holl e sakramant ann Aoter,
Eunn Doue kuzet, Jezuz hor mestr, hor Zalver.
Sperejou evuruz, prinsed euz he balez,
Gant karantez ardant meulit-hen da jamez.

Guir Vab Doue, evidomp holl inkarnet,
Ann env, ar mor, ann donar oc'h euz kronet.
Deut, va Zalver Jezuz, euz ann aoter, ho tron,
Da rei brema d'omp holl ho penedikSION.

Henor ha gloar gant karantez eternal
D'ann Tad, d'ar Mab, ive d'ar Spered-Santel.
Meulomp hag adoromp tri fersoun e Doue,
Epad ann oil amzer hag enn eternite.

3

ANN ILIZ

HAG AN ZAKRAMANCHOU

TON NEVEZ : Kroas ann hent.

D'an Pantekost, ar Spered-Glan
A zikennaz e teodon-tan
Var ann Ebestel, evit gouarn
Iliz Jezuz dre ho daouarn.

N'euz nemed eunn iliz hebken
A zo familh ar gristenien,
Familh ar gristenien fidel.
Dindan Jezuz hag he vikel.

Eunn iliz en deuz bet lezet
Jezuz eunn den or kaer meurbet :
Seiz feunteun ar zakramanchou,
Da skuill varnomp he veritou.

Dreizho ar c'haras zo d'eomp rost,
Kendalc'het ennomp ha kresket,
Hag o pec'hi mar he c'hollomp,
Dreizho he c'havout a c'hellomp.

Ar Vadiziant a rent dinam
Euz a hec'hed hon tad Adam
Hor gra bugale da Zoue
Hag heritourien euz an Ae.

Ar Gonfirmasion d'hon devo'hel
A ra d'eomp ar Spered-Santel
Gant nerz da fom stard el lezenn,
Egn desp'et d'hon enebourien.

4 VÆR AR FINVEZIOU DIVEZA

CON ANAVESSEZ

81

Sonjit, den faziet,
Sonjit e n'eternitel
C'houi, s'ic'hez, zo dallet
Gant ann drouk, ar vanite,

Sonjit e rankot mervel
Ha mont euz ar bed-ma,
Pa z'ouï Doue d'ho kerve
Aherz nemeur amez.

Gant kalz a spontt neuze
 Ez it dirak ar Barnar :
 Striz eo justis Doue,
 Ha goz a ze d'ar pec'her.
 Eur zetaus a resefot
 A vuéz pe varo,
 Hag ar stad m'en em gevlot
 Da viken a bado.

Nemed eur vech hebken
 Ar baradoz ne goller ;
 Euz ann ifern biken
 En em denna ne c'heller !
 Hogen baradoz kollet,
 Setu tout eat da goll,
 Ha baradoz gounezet,
 Setu gounezet holl.

Rost en devez Doue
 Ar c'hoaz d'hoc'h, e guirio-
 [nez,

Enn eil p'enn egile
 Da vont divar hor puez :
 Egn ifern p'er baradoz
 E' renkot chom atao,
 Da zevi pe da repoz,
 Goude pred ar maro.

Gant sonjal enn traou-zé
 Eaz vije d'hoc'h kimiada
 Diouz kement d'hoc'h éne
 A ra eur gaou ar brass ;
 E leac'h klask tu da bec'hl
 C'houl zistrofe a-grenn,
 E leac'h en em beur-zaoni
 C'houl rafe plinjenn.

Goulzkonde oc'h ken dall,
 Ken diboell, ken sheurtet,
 Ma n'eus nemed traou fall
 E pep korn euz ho spered.

Divez var ann affêr
 Euz ho silvidigez.
 N'oc'h euz bet enn he c'henver
 Nemed leziregez.

Saveteit hoc'h ene
 Ha d'ann ifern renonsit,
 Chozit abred ann Ee,
 Lakit ho poan d'he c'hounit
 Dre 'nn anvrou a drugarez,
 Dre ann holl vertuziou,
 Ha dre eur guir garantez
 'Vit Doue, hon Aotrou.

Kovesait a galoun
 Ho pec'hejou tremenet
 Ha goulennit pardoun
 O keuzia gent lealdou ;
 Reglit guelloc'h ho puez
 Heb kredi peil bava,
 Ha tremenit peb dervez
 Evel ho tizeza.

Ar bed a dremeno,
 C'houl a dremeno ive,
 Ann ifern a jomo
 Epad ann eternite.
 Ar blijadur zo moged
 A bad herrik amzer.
 Ha bepred poanion kalet
 A voasko ar pec'her.

Tec'hit eta buhan
 Divar hent fall ar pec'her,
 Pe var eur guele tan
 Abred c'hui vo gourvezet.
 M'oc'h euz diskouarn da ze-

Klevit ha klevit mad :
 Chozit hirio enn Envou,
 Varc'hoaz vo divead.

VAR AR MARO

Selaouit, ma Jezuz, selaouit ouz ma fedenn,
Ar maro zo spontuz, em maro deut d'am difenn.

Diskan :

Guerc'hez Vari, va mamm lenn a drue,
Em maro, gant Jezuz, roit sikour d'am ene.

Pa zeui spes ar maro da sponta va daoulagad,
Diskouezet d'inn, Jezuz, bizach ha kaloun eunn tad.

Pa zeui c'houezen ma zal ha ma dlou jod dislivet
D'ober heuz d'ar re all, c'houl, ma Jezuz, testaet.

Pa n'hellin ken klevet komzou ann dud, ma Zalver,
Komzit, c'houl, d'am c'haloun gant ho monez doue ha tener:

'Vit ar vech diveza pa larinn : Jezuz ! Jezuz !
Klevit, o ma Zalver, ouz ho pugel truezuz.

Pa gouezo ann daelou diouz ma lagad o vervel,
Bennigit-hi, Jezuz, grit ma vint daelou santel.

O Jezuz, pa velot ma c'haloun baour o ranna,
Var ma foan, ma anken, skuillit eur beradik joa.

Pa vo red d'inn kuitaat traou ar bed evit james,
Bezit, c'houl, ma Jezuz, ma mad, ma finvidigez.

P'en em zispartio evenz va c'horf va ene,
Hesevit, va Jezuz, ann offrans euz va bue.

Enn ho parnedigez pa vezinn, o va Jezuz,
Bezit doue em c'henver, roit d'in ar vuez enruz.

Me laka va fedenn, va buez ha va maro,
Etre daouarn Jezuz ha Rouanez ann envo.

ANN IFERN

Diskennomp holl, kristenien, enn ifern da velet
Doare trist estlammuz, ann enecou daonet
Zo eno, dre vir Doue, dalc'het ebarz ann tan,
O veza great goall zispign euz he c'hras er bed-mat.

Ann ifern zo eunn toull down, leun a denvalijenn,
E leac'h ne veler morse 'r bihana sklerijenn ;
Ann doriou zo bet serrret ha prennet gant Doue,
Ha n'ho digoro biken : kollet eo ann alc'houe.

Eur fourn c'horet er bed-ma ne d'eo nemed maged
E kenver-tan ann ifern, tan enecou daonet :
Guell e ve devi ennhil ac'hann da fin ar bed
Eget beza enn ifern epad eunn heur dalc'het.

Iudal a reont a bouez penn, evel chas kounnarot,
Ne c'houzont pe leac'h tec'het, e peb leac'h int leket ;
Ann tan zo var ho gorre, ann tan zo dindanho,
Ann tan zo a heb kostez hag ho devo ato.

Ar mab a lamet gant he dad, hag ar vero'h gant he mamm ;
D'ho stleja gant mil malloz dre ho bleo 'kreiz ar flamm !
Malloz d'ehoc'h, greg diaked, hag oc'h euz hor ganet
Malloz d'ehoc'h, tad didatvez, kiriek oc'h oump kollet !

Ho magadurez a vo da viken gant Satan,
Ann hirvoud, ann dizesper, etouez ar goaziou tan,
Hag ho evach, ho daelou... beradik dour ebet
'Vit ho muzellou disliv pe glaz gant ar zec'hed.

Ha kignet vo ho c'hroc'henn hag ho c'hig difreuzet
Gant beg ann aered viber ha dent ann diaouled ;
Hag enu tan e vo rulllet ho c'hig hag ho eskern,
Evit ma tevo krenvoc'h fourn skrijaz ann ifern.

Ann tan-ze zo c'houezet dre vuhanegez Doue,
Ne gollo ket euz he nerz hed ann eternite ;
Bik'n na daolo maged, ha b ken na zevo ;
Heb ebana d'ho leaki biken n'ho distrujo.

VAR AR GONTRISION

Done, guir briéd
D'ann eneon,
C'houl c'h euz va c'hrouet,
C'houl c'h euz va frenet,
C'houl c'h euz va c'hrouet,
'Vit ann envou.

Diskan :

Guerc'hez benniget,
Mamm druezuz,
Me am euz lazet
Dre veur a bec'hed,
Me am euz lazet
Ho mab Jezuz.
Abaone peil amzer,
Kovez, rann ouzhoc'h.
Ez oun, va Zalver,
Stouez ! eur pec'her,
Ez oun, va Zalver,
Enebour d'ehoc'h.

Allaz ! me zo bet
Bete vremen
Kalz re sheurtet
Ebarz em fec'hed,
Kalz re sheurtet,
Chench a rankann.

Pignomp, va ene,
Var ar C'halvar,
Guelomp eunn Done
Leun a garante,
Guelomp eunn Done
Enn he c'hlaohar.

He dreid zo griet
Gant ann tachou,
He gorf dispennet,

He benn kurunet,
He gorf dispennet
Gant ar fouetou.

Guel-hen divisket,
Savet er groaz,
He zaouarn staget,
He gostez toulllet,
He zaouarn staget
Gant tachou braz.

Me eo, va Done,
Me va-unan
Em euz heb true
Dre va goall vue,
Em euz heb true,
Kresket ho poan.

C'houl a zo bepred
Eur guir Zalver,
Na c'houlennit ket
E ve den kollet,
Na c'houlennit ket
Koll ar pec'her.

D'ho treid e pokann
Gant Madalen,
Re e taleann,
Re bell e kasann,
Re e taleann
Va finijen.

Gened koz bepred,
Bepred nevez,
Poent eo ho karet,
Salver benniget,
Poent eo ho karet
E guirionez.

ANN DIAOUL MUD

Don: Petra zo nevez e hear iz,

Pa zaoulinomp evit kovez,
Hon enebour zo var evez,
Ema tostik er c'hosez kleiz,
Dionallit..., braz eo he valiz.

Hanvet eo bet ann Diaoul mud,
N'e ket heb guir en deuz goall vrud;
Ifernias reaz kalz tud, siouaz !
Ha kalz re all a gollo c'hoaz.

Derc'hel kloz ginou ar pec'her,
Setu eno he holl vicher ;
Keit ha ma nac'her ar pec'hed
Her gout a ra : pardoun ebet.

Kaer o pefe iun ha lenva:
Ha lavaret *med culpa* :
Pec'hed a guzer er galoun
Biken n'en devezo pardoun.

Great o pe, siouaz ! kant torled ;
Mar kovesait, oc'h pardounet.
Grit eur pec'hed marvel hebken;
Mar hen nac'hit, pardoun biken.

Euz eur remed a ro pare
E rit eur poezoun d'hoc'h ene,
Hag e kreiz feunteun ar vuez
E kavlot maro didruez.

It, a lavar ar c'honfesor,
Ann env zo brems d'hoc'h digor.
Allaz ! d'ann ampoent, dourn Doue
A zo o serra dor ann Ee.

P'oc'h deuet da govez, hoc'h El-mad
A loa oc'h en em laouennaat :
Dlouzhoc'h, great ho sakrilaoh,
Krist-holl e tistro he vizaoh.

Ann Diaoul a loa bet nec'hiet
Gant soun ne rankje kuit tec'hiet ;
Mes ems brema adarre
Lojet brag-braz enn hoc'h ene.

Gant ho teod gaouiad ar poezoun
A zo kuzet enn ho kaloun ;
Ha, siousaz d'hoc'h, bete 'r mare
Kuzet ha kuzet e chomo.

Ann Diaoul mud gant he ardou
A zalc'ho serret ho kinou,
Ha rentet mud enn ho puez
C'houi varvo mud.... taolit evez !

VAR AR GOMMUNION

~~TOU ANAVREZ~~ 91

Elez euz ar baradoz, sellit pebez henor
A ra deomp ar zakramant Jezuz, hon redemptor !
Eur vech evit hor prena ez eo bet inkarnet,
Hag evit dont d'hor maga ganeomp e chom hepred.

Diskan :

Mari, guir vamm da Zoue, Mari, va mamm dener,
Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver.
Me ne d-oun slouaz ! netra, netra nemed pec'hied,
Mes ennoc'h ec'h esperann, o ~~hann~~ benniget.

va mamm

Krouer ann Env, ann douar, var ann aoter, bemds,
Dre gomz nerzuz ar belek, a ziskenn euz ann Ee ;
Eunn Doue, kaziz hueloc'h eget ar firmamant,
En em izela dindan spesou ar zakramant.

Eunn Doue ne jench jamez epad ann holl amzer,
Eunn Doue var half he zourn a zoug ar bed antler,
En em tez dre ar belek da veza diblaset,
Evit disken e kaloun ar psoura zo er bed.

O miraki ar souezusa etre ar miraklou !
O burzud ne c'hell koumpren ar c'haera sperejou !
Evit gounit kalounou ho pugale ingrat,
Ho megit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho koad.

Nann, evit eur mab unik, ar vamm ann deners
Biskoz ne zantaz kement he c'haloun o tomm
Goude ker braz karantez, ha ! p'ou c'heffe refus
Konsakri he holl galoun d'ho karet, va Jezuz !

Mar d-eo dister kalounou ar Zent hag enn Elez
Evit karet eunn Doue ken din a garantez,
Penaoz e prizit, Jezuz, dre ar gommunion,
Euz kalounou ker siklaset dont da ober ho tron ?

Penaoz kredi azeza ouz taol zalar etinn Doue,
Goude beza offanset kement he vajeste !
D'ho taoulagad, va Zalver, nb c'hellomp prezanti
Nemed kalounou siouaz ! leun a ingrateri.

Goulzkoude, pa gommandit tostaat ouz ho panked,
Dre eur gomz a drugarez effasit va lec'hed,
Teuzit skias hor c'halounou gant tan ho karantez,
Neuze ni ho resevo gent joa ha sahtelez.

Prestit d'inn ho tiouaskel, va El-mad soursinuz,
Ma nijinn evel eur goulm etre divreac'h Jezuz,
Me roi dez'han va c'haloun, hen roi d'inn he hini,
Eno me a repozo e peoc'h ha dizoursi.

TO. VAR AR GOMMUNION

Diskan :

TON ANAVERET 91

Deut, va Doue, deut da ren em c'halon,
Deut d'am maga dre ar gommunion.

Va ene paour a zo ouz ho kostez, va Zalver,
Evel eunn douar ien, skarnilet gant goall smzer.

Mar d-eo guir ho komzou, c'houl a vezo d'am ene
Ar glao dous a bardaez pe glizennik ar beure.

C'houl eo ar pastor mad, me ann danyad dianket ;
Edon kreiz ar bleizi, hag oc'h euz va diboaniet.

Mar d-oc'h ar medisin, me siouaz ! eo ar c'hlanvouz,
Louzaquit ar gouliou great d'inn gant va enebour !

Medisin, pastor mad, n'e ket aoualc'h kement-se,
Bez' ez oc'h em c'henver eunn tañ leun a garante.

Dre ma tostaan ouzhoc'h ha dre ma tomm ya c'haleñ
Hi lavar ez oc'h c'hoaz he fried hag he mignon.

Rak-se 'ta, va Jezuz, me zeu da glask ho panked,
Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun, enn he zec'hed.

Stouaz ! piou ez ounn-me da vont davedhoc'h, Aotrou,
C'hoant am be da bellaat, pa zonzann em fec'hejou.

Hogen, c'houl hoc'h unan a c'houre'hemenn d'in tostaat
Livirit 'ta eur gomz hag en em gavinn e stad.

70

M

AR PASK KENTA

~~TEH ANAVEL~~

JEZUZ

Me 'm euz prepart eur banked,
Ar presiusa zo er bed,
Evit rei d'am holl bugale
Va c'horf, va goad ha va ene.

AR VUGALE

C'houl zo meurbed, o va Jezuz,
Enn hor c'henver karantezuz,
Evit beza d'eomp prepart,
Hirio ann deiz, eur seurt banked.

JEZUZ

Pell zo emacounn, ha deiz ha noz,
Eñn tabernakl ouz ho kortoz ;
Mall braz am euz, bugallgou,
Da ziskenn enn ho kalounn.

AR VUGALE

Allaz ! allaz ! ne gredomp ket
Mont d'ho reseo, Salver ar bed ;
C'houl zo ker braz ho santelez,
Ha ni bec'haz ken aliez.

Medisin, pastor mad, n'e ket aoualc'h kement-se,
Bez' ez oc'h em c'henver sunn tad leun a garante.

Dre ma tostaan ouzhoc'h ha dre ma tomm ya c'helou
Hi lavar ez oc'h c'hoaz he fried hag he mignon.

Rak-se 'ta, va Jezuz, me zeu da glask ho panked,
Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun, enn he zec'hed.

Skouaz ! piou ez ounn-me da vont davedhoc'h, Aotrou,
C'hoant am be da bellaat, pa zonzann em fec'hejou.

Hogen, c'houi hoc'h unan a c'hourc'hemenn d'in tostaat
Livirit 'ta eur gomz hag en em gavinn e stad.

70

11

AR PASK KENTA

~~THE ANAVEL~~ 9

JEZUZ

Me 'm euz prepartet eur banked,
Ar prealusa zo er bed,
Evit rei d'am holl bugale
Va c'horf, va goad ha va ene.

AR VUGALE

C'houi zo meurbed, o va Jezuz,
Enn hor c'henver karantezuz,
Evit beza d'eomp prepartet,
Hirio ann deiz, eur seurt banked.

JEZUZ

Peñ zo emsounn, ha deiz ha noz,
Eñ tabernakl ouz he kortoz ;
Mall braz am euz, bugallgou,
Da ziskenn enn ho kalounou.

AR VUGALE

Allez ! allez ! ne gredomp ket
Mont d'ho resso, Salver ar bed ;
C'houi zo ker braz ho santelez ;
Ha ni bec'haz ken allez.

JEZUZ

Mar emaoch e pec'hed marvel,
Na zeuit ket d'am banked santel ;
Araok, goalc'hit mad ho kaloun
E dour gallouduz ar pardoun.

AR YUGALE

E sakramant ar Binijenn,
Ni hon euz bet ann absolvenn
Ha redet o deuz hon daelou
Gant keuz guirion d'hor pec'hejou :

JEZUZ

Deut prim eta, deut d'ar banked
Am euz evidoc'h preparet ;
Tostait holl hag heb dale,
Laouennaat a reot ho Toue.

AR YUGALE

Pa'z oump galvet gant hor Zalver,
Ni dostaio ouz ann aoter.
N'en deuz ar c'haro c'hoant ker braz
Da redet d'ar feunteunioù glaz.

JEZUZ

Abarz dont da gommunia,
Goulennit pardoun da genta
Ouz kement oc'h euz ofanset,
Dreist holl ho tad, ho mamm garet.

AR YUGALE

Pardoun, va mamm, pardoun, va zad,
Me n'ouñn ket bet eur bugel mad ;
Hiviziken, dre c'hras Jezuz,
Me vo modest, dous ha sentuz.

JEZUZ

Pardounit, tadou ha mammou,
Pardounit d'ho pugaligoù,
Me ho deuz maia ofanset
Hag am euz d'hezho pardounet.

O Tad eternel, va C'hrouer,
 Hor c'hasit pelloc'h d'hor Zalver,
 Mall eo, n'hellomp ket mui gortoz,
 Roit d'eomp Jezuz pe varadoz.

Ha c'houl, Mari, ken truezuz,
 Hor renit da vont da Jezuz,
 Ma kavimp hirio ar vuez
 E sakramant he garantez.

12 ENN HENOR D'AR GALOUN SAKR

O Kaloun Sakr euz va Jezuz,
 Kaloun meurbet karantezuz,
 Plijet reseo, me ho suppli,
 Ann dezir a menz d'ho meull.

C'houi eo ar zoursenn presinz
 Euz ar grâsou krenv ha nerzuz
 A resevann, da bep mare,
 Hag a douch kement va ene.

O Kaloun Sakr, c'houl 'zo eunn-er
 Hag a velann bapred digor
 Da zigemer ar hec'herien,
 Pa fell d'he ober pinijenn.

Bet oñ siouaz ! o va Zalver,
 Diansoudek enn ho kenver.
 Sellit ouz va ene ingrat,
 Distrei a rann a galoun vad.

Totret am euz lezen Doue,
 Kant ha kant mil gnech em bue,
 Muntrer infam, pec'her divad,
 Treuzet am euz kaloun va Zad.

Ditâzhoc'h, Kaloun adorabl,
 Me ra va amand henorabl :
 Pardoun euz va zakrilañchou,
 Pardoun euz va holl fec'hejou !

Pardounit ivez ar c'hrimou,
Blasfemou, irreveransou,
Great bemdez gant ar bained
Ha gant ann holl heretiked.

Mez slouaz ! d'eomp-ni kristenien,
N'hon euz bet nemed ienien
Evit karantez hor Zalver
Er zakramant euz ann äöter.

Stouet holl betek ann douar,
Hor c'haloun rannet gant glac'har,
Kriomp gant eur vouez truezuz :
Pardoun, pardoun, Kaloun Jezuz !

Pastor mad, c'houi oc'h euz klasket
Ann danvad a ioa dianket,
Setu hen o c'houleunn pardon,
Digorit d'ezhan ho Kalon.

Me garfe gant va goad goalc'hi
Va malis, va ingrateri,
Da viana me ho gouelo
Betek ann heur euz va maro.

Ouspenn-ze, enn hoc'h ilizon,
Gant respet e rinn pedennou,
Ha gant eur guir devozion
Me ielo d'ar gommunion.

D'ann offerenn ez inn ive,
Gant feiz ha gant humilite,
Ofr a rinn eno d'ho justis
Ho Kaloun Sakr e sakrifis.

Esper am euz da rapari
Va malis, va ingrateri,
Dre verit ho koad prestuz
Hag ho Kaloun karantezuz.

Kemerit ivez, evit kred,
Kaleun ho Mamm zo bet treuzet,
Eharz ar groaz, gant seiz kleze,
Dre ann nerz euz he c'harante.

3
— 16 —

Unanomp brema hor monezlon,
Leveromp dre hor c'hantikou :
Gloar d'ho Kaloun, Salver Jezuz !
Gloar d'ho Kaloun, Mamm druezuz !

12 78 MEULOMP HOLL

Diskan :

Meulomp holl da james }
Jezuz hag he vadelez ! } bis.

Me he meul, o va Jezuz !
C'houi oc'h euz va c'hrouet,
C'houi oc'h euz va frenet,
C'houi am mag, o va Jezuz !

~~SON ANAVEZET~~ 4 /

Bennigt, o va Jezuz,
Va c'horf ha va ene,
Va mirit noz ha de
Euz a bep drouk, o Jezuz !

Mil bennoz d'ehoc'h, o Jezuz !
C'houi a zo va fastor,
C'houi a zo va zenzor,
C'houi zo va holl vad, Jezuz !

Hastit, hastit, o Jezuz !
Terri va jadennou.
Ah ! pegoulz, enn Evon,
Ho meulinn-me, o Jezuz !

Pardounit, o va Jezuz,
Va faotou tremenet.
Enn amzer da zonet,
Me vo fidel d'ehoc'h, Jezuz !

Ra vezo meulet Jezuz
Dre holl, da bep mare,
Ni bemnoz ha bemde [uz] !
Meulomp holl, meulomp Je-

13 74 KANTIK AR BARADOZ

Jezuz, peger braz va
Plijadur ann ene,
Pa vez e gras Done }
Hag enn he garante. } bis.

Berr 'kavann ann amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal detz ha noz
E gloar ar Baradoz.

~~SON ANAVEZET~~ 9 /

Pa zellann enn Envo
Hag strezek va bro,
Nijall di a garfenn
Evel eur goulmik venn.

Pa vo pted ar maro,
Neuze me gimlado
Dionz ar c'hig ankeniuz,
Enebour da Jezuz.

Gortoz a rann gant joa
Ann termen diveza,
Hast am euz da velet
Jezuz, va guir bried.

Kerkent ha ma vezo
Torret va jadenno,
M'en em zavo enn er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar gloar,
Dreist ann heol, ar stered,
Me a vezo douget.

Eat pell diouz ann douar,
Traonienn leun a c'hlac'har.
Neuze me rai eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :
Kenavo d'id, va bro,
Kenavo, bed poanuz,
Gant da bechou troumpluz !

Kenavo, paourante,
Kenavo, vanite,
Kenavo, trubullou,
Kenavo, pec'hejou.

Pelloc'h na zoujinn ket
Ardou ann drouk-spered
Biken me n'em gollo
Goude pred ar maro.

Goude pred ar mario,
Gant joa me a gano
Torret eo va jaden
Ha ma libr da viken.

A bep tu pa zellinn
Kement tra a velinn
A rai d'am daoulsad
Ha d'am c'haloun-mil vad.

Dorlou ar Baradoz,
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zentezed,
Prest d'am digemeret.

Ma vo digemeret
E palez ann Dreinded,
E kreiz ann henorlou
Hag ar meuleudiou.

Ma c'hello, evit mad,
Guelet Doue, ann Tad,
Gant he Vaz eternel
Hag ar Spered-Santel.

Me a velo Jezuz,
Eun eur c'hiz dudiu,
O lakat var va fenn
Ar gaera kurunenn.

Ho korlou evuruz,
A lavaro Jezuz,
Oa tenzoriou kuzet
Eun douar benniget ;

C'houi zo, em baradoz,
Evel bokedou roz,
Diyleuniet d'ar mare
Hag a vletu adarre.

Pegen dous 'vo klayst
Jezuz o lavaret :
Deut, servicher fidel,
Deut d'ar gloar eternel.

Evit poanlou dister,
Evit ankenion berr,
Me vezo paet mad
Gant Doue, va guir dad.

Kaer e vezo guslet
Ar Verc'h-z benniget,
Gant daouz k steredenn
A ra he c'hurunenn.

Guelet a rinn ouspenn,
Gantho peb a dalenn,
Ete hag Arc'hele,
Holl e veuli Doue.

Guelet a raimp-ni c'hoaz,
Leun a c'hloar, leun a c'hras,
Hon tado, hor mammo,
Hor breudeur, tud hor bro ;

Guerc'hezad a bep oad,
Sentezed a bep stad,
Grag-z intanvezad
Gant Doue kurunet.

Ann holl siedigon
Var ho askelligou,
Ker mignoun, ker laouen,
A nijo dreist hor penn.

Eurzded heb he far,
Sonjal ennhoc'h me gar,
C'houi 'ro nerz d'am c'halon
Pa gouez anken varnon.

Enn holl boaniou kalet
A gorf pe a spered,
Me zozjo deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

14

18

BENNOZ HA MALLOZ

Loz-Breiz

9 f

Eurz ann hini a garo Doue
Euz he holl galoun hag he holl ene (bis)

Ann den a blijo da Zoue, hon Tad,
A zo diouallet ha diouallet mad.

Eun ti hag er park, enn deiz hag enn noz,
Doue varnezhan a skulllo bennoz.

Ganthan he bried hag he vugale
O devezo perz e bennoz Doue.

Evel eur vezenn, douret he grizlou,
E tongo frouez, delion ha bleuniou.

Ma'z eo pinvidik, e rai vad d'ar paour,
He zourn a vo prest atao d'her zikour.

Ma n'en deuz danvez, en deuz kalz guelloc'h :
He galoun zo iac'h, chast ha leun a beoc'h.

Diouz c'houezenn he dal a tebr he vara,
Goude sin ar groaz, heb klemm a netra.

Laouen er vuez, laouen er maro,
Gant ann Elez mad d'ann Eav e pigno.

Evidoud, pec'her, nec'h euz da c'hedal
Nemed buez trenk hag eur maro fall.

Pec'her, deuz enn dro, deuz ha deuz buhan,
Rañk ganez dija ema c'houez ann tan

Kemer heb dale hent ar Baradoz,
Pe, m'hei lavar d'id, kaout a ri malloz.

13
re. ANN AVE MARIS STELLA

Ni ho salud, steredann vor,
Mamm da Zoue, leun a honor :
Guerc'hez bepred, dor ann envou,
Selaout ouz hor pedennou.

Resevit ar zalud santel
A reaz d'ehoc'h ann El-Gabriel,
Roit eur peoc'h ferm d'comp er bed-ma,
O chench ann hano a Eva.

Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re zo dall roit sklerijenn ;
Pellait diouzomp peb drouk dalc'h-mad
Ha goulennit d'comp peb seurt mad.

Diskouezit ez oc'h eur vamm vad
E kenver ann dud emzivad,
Grit m'hor selaouo ann Hini
Oc'h euz ganet evidomp-ni.

Guerc'hez dispar e peb feson,
Dous dreist ann holl, pur a galon,
Euz hor pec'hejou dilivret,
Grit ma vimp dous ha chast bepred.

Grit ma vezo hor buez pur,
Preparit d'comp ann hent asur,
Ma vesimp, o velet Jezuz,
Eunn delz, ganeoc'h bepred euzuz.

Gloar sto d'ann Tad Eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel ;
D'ann tri fersoun euz ann Dreinded
Ar memes honor 'zo dieet.

16 17 KONSEKRASION D'AR VERC'HEZ

Santez Mari, Mamm Doue, e pep amzer guerc'hez,
Jezuz a zo va roue ha c'houi va rouanez ;
Evel ma'z eo va barner, bezit va fatrounez,
Hag evidon dirazhan bezit alvokadez.

Etouez ho servicherien me ho ped d'am reseo,
Meurbet eo dous ho servich, servich ar bed c'houero ;
Rak-se hoc'h abandouni, dilezel ho preniez,
A ve redet d'ar malheur d'en em goll da james.

Euz va ferz e prometañ na rinn na livirinn
Netra enep hoc'h henor ; biken na bermettinn
E ve den bujet d'inn-me ken hardiz, ken ingrat,
Da offansi Mamm Jezuz, eur vamm ken dous, ker mad

Evit gallout henori ann hanô a zouget
A Vamm a vizerikord, a Vamm Salver ar bed,
Me a bromet soulañ ar beorien afflijet,
Dre ma'z int holl ar memproù euz ho Mab benniget.

Hed va buez, em euvrou va zikourit bapred,
Dreist peb tra var va maro n'am abandounit ket ;
Dre ho taouarn d'am Zalver prezantit va ene,
Sur ez inn d'ar baradoz dre ho sikour goude.

17 18 FIZIANZ E MARI

Me a laka va fizians,
Guerc'hez, enn ho sikour,
Akkordit d'inn azistans
Enep hon adversour ;
Pa skol va heur diveza,
Me bed ho madelez
Da obteni d'inn beza
Pleket gant ann Elez.

O Mamm leun a drugarez,
O Guerc'hez benniget,
E peb leac'h ha bemdez
Hor zikourit bapred ;
Prezantit d'ho Mab Jezuz
Pedenn ho pugale,
James ne c'hell ho refus,
Sur oump gement-se.

ca/

Guere'hez gloriuz Vari,
 Refuch ar bec'herien,
 Me ho ped d'am c'honforti
 Em spount, em zroublenn;
 C'houi am difenno guella,
 Ho Mab zo va roue,
 Ar pezh a ra d'inn krena,
 Va barnar eo ive.

Pa varvinn, va Mamm denar,
 Truezuz em andred,
 Kalmit justis va barnar,
 Pe sur e vinn kollet.
 O Mamm leun a vadelez,
 Difennit ho pugel,
 Ha betek fin va buez
 D'ehoc'h me vezo fidel.

Evit kreaki ar c'hloar
 A zo dleet d'ehoc'h, Guere'hez,
 M'ho karo var ann donar,
 Rouanez ann-elez.
 Evit plijout d'ho kalon
 Ha guell hoc'h henori,
 Kement den zo dindanon
 A zouginu d'ho meuli.

Sec'hit eta va daelou,
 Mamm ar guir garantez;
 Va c'honsolit em foaniou
 Hag em zristidiguez;
 Torrit va holl jadennou,
 Resevit va c'halon,
 Rouanez euz ann Envon,
 Renit, renit, varnon!

18 19 ENN HENOR D'AR VERC'HEZ

Diskan :

Bemdez, bemnoz hag e peb ti,
 Meulomp Mari!

Pegen kaer eo ar c'hantikou,
 Pegen euruz ar parrezion
 Pa lavar holl ar c'halounou :
 Meulomp Mari!

Plijet ganehoc'h, Sent hag Ele,
 Unani ho mouez gant hor re,
 Hor c'han a vo kaeroc'h neuze :
 Meulomp Mari!

Ni zo da Vari konsakret,
 Da Vari ni vezo bepred,
 Kanomp eta gant joazded
 Meulomp Mari!

For : O All et Allé!

481

Kalz a zoug respet da Vari
Ha kalz o deuz fizianz enphi,
Aman ann holl a zo dezhi :
Meulomp Mari !

Mari, var ann Elez renet,
Ann anaoun a boan tennet,
Torrît holl nerz ann drouk-spered :
Meulomp Mari !

Mari, refuch e peb mare,
Mamm dous bepred d'ho pugale,
C'hout hor c'hiuduo da Zoue :
Meulomp Mari !

Mari, n'hellomp obten pardon,
Na trec'hi ann dentasion,
Nemed dre ho proteksion :
Meulomp Mari !

Hab Mari ne ver ket salvet,
Gant Mari ne ver ket kollet,
Mari, ni a vo dehoc'h bepred.
Meulomp Mari !

Selaouit, Mari, hor pedenn,
Hed hor buez deut d'hon difenn,
Deut var hor miao d'hor zouten :
Meulomp Mari !

Mari, pa'z oc'h ken gallouduz
Bezit ive trugarezuz,
Hor prezantit d'ho Mab Jezuz :
Meulomp Mari !

Grit ma vezo justis Dous
Dous e Kenver ho pugale,
Grit ma'z aimp da gana enn Ee :
Meulomp Mari !

ANN ITRON VARIA

Diskan :

SON : *Bale Arzuz* 8/

Peger kaer ez eo Mamm Jezuz,
Pegen dous ha trugarezuz,
Peger miz he madeleuz !

Lavar d'inn-me, den ann Arvor,
Ha ker kaer eo da vag var vor,
Gant he gouelioù guenn-kann digor ?

Lavar d'inn-me, den ann Argoat,
Ha ker kaer deliou glaz ar c'hoat,
Pa zeu eur ban-eol d'ho skleraat ?

Lavar d'inn-me, den ann Are,
Ha ker kaer eo lein ar mehe
Guenn-kan gant ann ere'h, d'ar beure ?

Lavar d'inn-me, paotr ann derved
Hag hen zo steredenn ebet
Ker kaer enn noz steredennet ?

Livirit d'inn, tud ar mezlou,
Ha ker kaer ez eo glazennou
O lintra gant ar glizennou ?

Livirit d'inn, bugaligoù,
Er prajou o kutuil bleunioù,
Ha bleun ker kaer zo er prajou ?

— Nag enn Arvor, nag enn Argoad,
Er menez, enn oabl nag er prad,
Netra ker kaer, netra ker mad.

21. ENN HENOR DA GALOUN MARI

Kaloun dous a Vari,
Léon a garantez,
Ni deu d'ho saludi
Gant ann holl Elez.

Diskan :

Ave, ave, ave Maria !
Ave, ave, ave Maria !

Fenneun ann holl grasou,
Seillit gant true
Ouz ann holl ezomou
Euz ho pugale.

Tenval eo ar goabrenn,
A bep tu arne ;
Dilezet ar bedenn,
Dilezet Doue.

Ia, memes enn hor Breiz,
Guech-all bro ar Zent,
Da Zons, d'he Iliz
Kalz a zo dizent.

Roit d'ann den dallet
Gras ar sklerijenn,
D'ar pec'her kaledet
Gras ar bintjenn.

Enn hon tiegezlou
Lakit union,
Hag enn hor c'halounou
Guir relijion.
C'houi zo Mamm da Jezuz,
Mamm ar gristenien,
Refuj trugarezuz
D'ann holl bec'herien.
Stouet onmp d'ann douar
Dirak ho kaloun,

Gant keuz ha gant glac'har
O c'houlenn pardoun.
Brud euz ho trugarez
A zo e peb bro,
'Vit ker braz madelez,
Holl ni a gano :
Ennhoc'h hon holl fizians
Epad hor bue,
Ennhoc'h hon esperans
Er ma re ive.

22. GUIR VUGALE AR VERC'HEZ

(TON NEVEZ : His Probantuzh.)

Guir vugale ar Verc'hez a die beza santel
Ha startaat e gras Doue, bemdez betek mervel.
Ann dud laosk-se ne raient nemed fallgalouni
Pennaos a c'hellent beza hugale da Vari ?

Guir vugale ar Verc'hez a vezo chast ha fur,
Strinka raint euz ho c'haloun peb elfenn tan impur ;
Lent vezo ho daoulagad, ho ginou heb gevier,
Ne d'aint morse d'al lec'hioù a ve enno danjer.

Guir vugale ar Verc'hez, diouz ann noz, ar mintin,
Evit adori Doue a gouezo d'ann daoulinn :
Abred emä ar pec'hed var roudou ann hini
A zo, siouaz evithan, dieguz da bedi.

Guir vugale ar Verc'hez a gare ho nesa,
Gant ar paour, enn han' Doue, e rannint ho bara ;
Ober a raint joazdet hag ho mamm hñg ho zad.
Dre ma vint dous ha sentuz, ha mad da labourat.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo aketuz
Da vont, eur vech ann amzer, betek aoter Jezuz,
Evit ha zigemeret gant feiz ha karantez,
Ha bale; heb fazia, var hent striz ar vuez.

S. Bourraet
etc. supprime

Guit vugale ar Ver'hez a vezo da Zous
H ; c'horf gant ho skitschou. ho c'haloun, ho ene,
Kerzet raint er skerjenn ; ho dourn e dourn Mari,
Betek ann deiz ma velint ann Env o tigeri.

pourrait être supprimé

22
23
24
25
26
27
28
29
30
31
32
33
34
35
36
37
38
39
40
41
42
43
44
45
46
47
48
49
50
51
52
53
54
55
56
57
58
59
60
61
62
63
64
65
66
67
68
69
70
71
72
73
74
75
76
77
78
79
80
81
82
83
84
85
86
87
88
89
90
91
92
93
94
95
96
97
98
99
100

28

MAGNIFICAT

Magnificat * anima mea Dominum.

Et exsultavit spiritus meus * in Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ suæ, * ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes generationes.

Quia fecit mihi magna qui potens est, * et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies * timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo ; * dispersit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede, * et exaltavit humiles.

Esurientes implevit bonis, * et divites dimisit inanes.

Suscepit Israel puerum suum, * recordatus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros, * Abraham et similia ejus in sæcula.

Gloria Patri, etc.

AVE MARIS STELLA

Ave, maris stella,
Del mater almæ,
Atque semper virgo,
Felix cœli porta.

Sumens illud ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Evæ nomen.

Solve vincula reis,
Præfer lumen cæcis,

Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem,
Sumat per te preces,
Qui pro nobis natus
Tulit esse tuus,

Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culpæ solutos
Mites fac et castos.

Vitam præsta puram,
Iter para tutum,
Ut videntes Jesum,
Semper collatetur.

Sit laus Deo Patri,
Samm Christo decus,
Solentur Sancto
Tribus honor unus.

26 25

AR ROZERA

CHAPELED A JOA

1. Sonjomp, d'ar genta dizañez,
Er joa e devoue ar Verc'hez,
Pa ous gant ann El saludet
Da veza mamm Salver ar bed.
2. Eñ eil mister, sellomp Mari
O kuitaat he bro hag he zi,
Evit gnetet Elisabet
A zouge sant Iann benniget.
3. Eñ trade mister, hor Zalver
'Zo ganet enn eur c'hraou dister,
Hag a lavar d'omp distaga
Hor c'haloun diouz traou ar bed-ma.
4. Er pevare mister joañz,
Ar Verc'hez gant he Mab Jezuz
En em offr enn templ evidomp,
Ganthe da Zoue 'en em offromp.
5. Er pemped mister, ar Verc'hez
A gavas, goude tri devez,
He Mab e kreiz ann doktored,
Leun a furnez hag a spered.

CHAPELED A GEUZ

1. Ar c'henta mister truezuz
A ziskouez d'omp glac'har Jezuz,
Beuzet enn eur c'houezenn a c'head
Ha stouet o pedi he Dad.

2. D'ann eil mister, e oue freuzet
He gorf santel a daollou fouet;
Evit ar pec'hejou mezuz
E c'houzany eur boan ken euzuz.
3. D'ann trede, e oue kurunet
He benn sakr, heb truez ebéd,
Dre eur gurunenn great gant spenn,
D'hon dilivra euz ann ifern.
4. Er pevare mister, Jezuz
Dindan eur groaz pounner, mezuz,
A gerz etrezek ar C'halvar;
Heullomp-hen holl leun a c'hlae'har.
5. Er pemped mister, Mab Doue
A ro evidomp he vne.
Pion a vezo c'hoaz ken ingrat
Da offansi Jezuz ker mad ?

*Marguerite
Les registres
Glorieux*

28 D'HOR MAM SANTEZ ANNA

Diskan :

D'hor mamm santez Anna,
D'an Itron Varia,
D'hor Zalver benniget
Ni vo fidel bepred !

Hor c'halon baour mantret
Gant glae'har hag enkreuz,
Ni a zo daoullnet,
Dirazoc'hul Guere'hez.

Kurun hag avel foll
Varnomp zo difollet,
Hor bro zo vont da goll ;
Truez ! mamm benniget.

Lezen Doue guechall,
Rene ker kaer ar vro,
Hirio lezen tud fall
He stleñ eun d'ar maro.

Vel eur vanden chas mud,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emañ etouez an dud
O klask mouga ar Feiz.

Ni zo gnr gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet en he lezen
En he zoujans ive.

Ni a zo kristenien
Preñet gant goad Jesus,
Maget dre c'houre'hemen
Gant he gorf presius.

Kristenien, hor baniel
A zo kroaz hor Zalver,
Ni her zao soun 'n huel;
Bemdez, e peb amzer.

Eur vrezel griz meurbet,
Zo grest d'hor bugale ;
Ah ! n'ho dilezit ket,
C'hui zo ho mamm ive.

Ar falla kentellon
Zo roet dezho hepred,
Koil a raint ho eneou,
E skol an Drouk-Spered.

Simpl, dinerz, ker bian,
Ma ne vant dionallet,
Gant nebeut a boan
Abred vezlent trec'het.

Petra dalv guiziegez,
Mar gollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A zo oll e Doue,

Guechall hon tadou koz,
Brudet 'vit ho furnez,

A glaske 'r baradoz
Araok ar guiziegez.

Skianchou zo netra
Pa'z eont enep Doue ;
Ni fell dqomp dreist peb tra
Savetei hon ene.

Guere'hez, hor mamm santel,
Roit sikour ep dale.
E plegou ho mantel
Kuzit hor bugale.

C'hui a zo gallouduz
Var galon hor Zalver,
Bezit madelezuz,
C'hui zo eur vamm dener.

E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni oll, Guere'hez,
Beteg heur hor maro,
Ni a gano bemdez :

OLL DA ZOUÉ

Diskan :

Klevit, o Mamm a druez,
Peden hon tadou koz ;
Oll da Zoue'epad hor buez,
Oll da Zoue er baradoz ! } *bis.*

Ni gar Doue e peñn hor skoliou,
Ebdhan skol vad ne gaver ket ;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Ebdhan nag urz na peoc'h shet.

Ni gar Doue var hor meneziou,
Ni gar Doue var hor mor glaz,
Ni gar Doue e kreiz hor c'hoajou,
En hor c'halonou mil gueach
[c'hoaz !

Air français : Nous voulons Dieu.

Ni gar Doue en hor pardoniou,
Doue a ra ho levenez !
Ni gar Doue en hon eurejoug,
Doue ho joa hag ho danvez !

Ni gar Doue, ni gar he lezen ;
Pell diouzomp, tud dizoue !
Ni gar Doue, ni gar ar beden,
Doue eo mezur hon ene !

Ni gar Doue hag he groaz santel,
Var gement hent, e kement ti !
Kroaz Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgaleuni !

Ni gar Doue, ô tud digreden,
A c'hoanta hen diskar er vro.
Ni lavaro gant hor feiz kristen :
Kentoc'h mervel ivez d'hon tro !

Oll da Zoue hor bugaligou,
Hon tud iaouank o vont er bed !
Oll da Zoue, gant hor priedou,
Hon tud koz var hent ar vered !

Oll da Zoue hor martolodet,
En doun-vor dare da dremen !
Oll da Zoue hor guir soudardet,
E kreiz an tan, var an-dachen !

Oll da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat !
Oll da Zoue ! Setu hon-honor,
Setu hon nerz e pep stourmat !

Oll da Zoue !... an hano kaer-ma
Hon harpo ouz an dud difeiz.
Oll da Zoue !.. Skrivomp anezhan
Var gement karrek zo e Breiz.

Oll da Zoue !.. E pred ar maro,
Doue d'he dro ne nac'ho ket
Kement kristen mad a lavaro :
Biskoaz Doue n'em euz nac'het !

ROUANEZ ARVOR

(*Non + Les-Breiz*)

Rouanez Arvor, oll ho saludomp,
O Guere'hez dinam, ennoc'h e kredomp ! (*bis*)

O Guere'hez Vari, dre oll ha bepret,
C'hui voue gant Breiziz an Itron garet.

Guechall hon tud koz, sentuz d'ho lezen,
En em vouestlaz oll-deoc'hui da viken.

Hag a-c'houdevez, al le zo miret,
'Vel en deiz kenta ma 'z e bet touet.

Hon Arvor a vev dre ho madelez :
Ni zo bugale deoc'hui da jamez.

Euz ho pugale, o Mam, klevit 'ta,
Klevit ar beden hag ar bromesa !

O Mam hor Zalver, evel hon tadou,
Ni roda viken deoc'h hor c'halonou.

Mes priijt d'ho tro; arc'h a esperans,
Souten an Iliz, savetel ar Frans.

Mar be red difen he honor d'hor bro,
Ar Breizad kristen dispount a gerzo.

Dindan ho skoazel, epad an emgand,
Soudard, martolod, 'ra fae var an-tan.

Ar micherour paour, al labourer kez,
A drid ho c'haloun gant ho karantez.

Mam, roit ho pennoz deomp ha d'hon tudou;
Ha d'hor parketer, kouz ha d'hon aochou !

D'hon tiegeziou ha d'hor bugale,
Ha d'hor mignouned zo er gear du-ze !

D'hor martolodet ho pennoz ivez,
Hi gas oc'h hano d'an Douar-Nevez.

Skuillit ho pennoz var hor soudardet,
Rentit d'ho banniel he gloar hag he sked.

Hag hed hor buez, euz ho krasou c'hul,
Ni hor bezo sonj, o Guerc'hez Vari !

Euz ar roc'h santel, pa vimp en hor bro,
Ar zonz d'adinz ganeomp a jomo.

Endra bado 'i bruk var hor menezlou,
Karantez hor Mam vo 'n hor c'halonou.

Rag ho pugale, o Guerc'hez santel,
A c'hed dreizoc'hul ar vuez eternal.

Oll en ho kichen en anv, eun devez,
Fell dezho beza, Mamm a garantez !

à supprimer 29

CREDO

Credo in unum Deum, Patrem omnipotentem, factorem caeli
et terrae, visibilium omnium et invisibilium. Et in unum
Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum. Et ex
Patre natum ante omnia saecula, Deum de Deo, lumen de
lumine, Deum verum de Deo vero, Genitum, non factum,
consubstantialem Patri, per quem omnia facta sunt. Qui
propter nos homines, et propter nostram salutem, descendit
de caelis. Et incarnatus est de Spiritu Sancto, ex Mariâ Vir-

à l'empereur 90

sine, et homo factus est. / Crucifixus etiam pro nobis, sub
 Pontio Pilato, passus et sepultus est. / Et resurrexit tertia
 die, secundum Scripturas. / Et ascendit in caelum, sedet ad
 dexteram Patris. / Et iterum venturus est cum gloria, judi-
 care vivos et mortuos, / cuius regni non erit finis. / Et in
 Spiritum Sanctum, Dominum et vivificantem, qui ex Patre
 Filio, de procedit. / Qui cum Patre et Filio simul adoratur et
 conglorificatur, qui locutus est per Prophetas. / Et Unam,
 Sanctam, Catholicam et Apostolicam Ecclesiam. / Confiteor
 unam baptismi in remissionem peccatorum. / Et expecto
 resurrectionem mortuorum. / Et vitam venturi saeculi. / Amen.

28

30 EVIT AR VENEDIKSION

O salutaris hostia,
 Quae coeli pandis ostium,
 Bella premunt hostilia ;
 Da robur fer auxilium.

Uni trinoque Domino
 Sit sempiterna gloria,
 Qui vitam sine termino
 Nobis donet in patria. Amen.

Sub tuum praesidium confugimus sancta Dei genitrix ; nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus : sed a periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et benedicta.

Oremus pro Pontifice nostro N***. — Dominus conservet eum, et vivificet eum, et beatum faciat eum in terra, et non tradat eum in animam inimicorum eius.

Tantum ergo sacramentum
 Veneremur cernui,
 Et antiquum documentum
 Novo cedat ritui :
 Praestet fides supplementum
 Sensuum defectui.

Genitori Genitoque
 Laus et jubilatio,
 Salus, honor, virtus quoque
 Sit et benedictio :
 Procedenti ab utroque
 Compar sit laudatio. Amen.



Supplies n. 3

127. Laundry

128. Roman

129. Armenian

Talbot